

MATILIN AN DALL

Diskan

Me eo Matilin an Dall
Ar bombarder laouen
A laka 'n dud da zañsal
Diwar va barrikenn :
Un taol sut! Ha souden
Paotred skañv d'an abadenn
Ur bomm sonn ha raktal
Paotred o fringal! Ge!

Breizhiz, va c'henvroiz karet,
Hirio siwazh me a zo kozh
Nag a bet gwech em eus sonet
Da zañsal en deiz hag en noz,
Ha mar plij gant santez Anna
E klevoc'h c'hoazh war an dachenn
Son skiltrus va bombard velen
O lakaat tud hor Breizh da dridañ.

Yaouank e kollis ar gweled
An eostig, ma lavarer mat,
A gan flouroc'h en e gaoued
Pa vez dallet e zaou lagad.
An dall a gêrig Kemperle
En e lochenn war ribl an dour
Evel an eostig a son flour
Etre an Izol hag an Ele.

Yannig ar Chapel em c'hichen
A c'hoari gant e vinioù
Dreist-holl pa sun bord e werenn
Evit souplaat e vuzelloù.
Nag eñ a sko, Yann va c'homper
Gant e sonerezig lirzhin
Ha d'e heul pa sko Matilin
Eo fars gwelet penaos e fringer.

Hervez Jean Quéré, 1825-1898

AR GOULENN-EURED, DIVIZ ETRE AR JUBENN HAG AN TAD

Ar jubenn pe ar bazhvalan zo o klask ur plac'h yaouank evit ar paotr yaouank emañ o labourat evitañ. Dont a ra e ti tad ur plac'h yaouank da glask « ur goulmig wenn »...

Ar Jubenn

Deiz mat deoc'h holl, tud an ti-mañ,
Kel laouen ho kavan,
Ker brav gwisket, e pep feson,
Ma lavar din stok va c'halon,
N'hellin biken tremen ho ti,
Hep dont d'ho saludiñ.

An Tad

Ni a zoug ar memes salud,
Deoc'h-c'hwi koulz ha d'ho tud,
An onestiz eus ho komzoù,
Ar bervig dous eus ho selloù,
A lavar deomp, sklaer hag anat,
Ho peus ur c'heloù mat.

Ar Jubenn

Ni zo war-lerc'h ur goulmig wenn,
Gwall dizhet gant un tenn,
He askell kleiz a zo torret,
Nijal mui pell ne oufe ket
Hag e klevis ez eo emañ
Emañ deut da gouezhañ.

An tad a ra tro an ti ha kinnig a ra d'ar jubenn e wreg, unan eus e verc'hed dimezet, ur c'hrouadur bihan ganti war bleg he brec'h, ur verc'hig ha n'emañ ket c'hoazh en oad da zimeziñ hag erfin ar plac'h-nevez...

An Tad

Nag an aelig-mañ da Zoue
Hag ho koulm e vefe?
Plac'hig vihan savit ho penn
Da sellet ouzh ar gristenien
Ho lagad glas, ho plev melen,
Ne raint ket droug da zen.

Ar Jubenn

Gant an heol tomm hag an amzer
Ez eo aog ar mesper,
Bloaz 'zo an hini a glaskan
A oa glas-dour evel houmañ,
Met hirio 'tistag diouzh ar brank,
War sin un den yaouank.

An Tad

Va mignon, n'eus den evidoc'h,
Rak-se greomp ar peoc'h...
Setu ar plac'h a c'houlennit,
Hogen, den yaouank, diwallit
Na ve morse kerse ganti
Bezañ kuitaet he zi.

Yann Wilhou Herry

AR GOULENN

Ar ganaouenn-mañ zo tennet eus ar Barzhaz Breizh. Un disput etre ar bazhvalan hag ar breutaer, an alvokad. Ar bazhvalan zo o komz en anv ar paotr yaouank hag ar breutaer en anv ar plac'h-nevez. Ar bazhvalan a lavar emañ o klask ul labous gwenn, ur goulmig hag a zo aet kuit eus e di evit dont e ti ar plac'h yaouank. Un nebeud komzoù eus ar ganaouenn-mañ zo lavaret gant an daou gomedian er pezh-c'hoari, el lodenn tri.

Ar bazhvalan

En anv an Tad hollc'halloudek,
Ar Mab hag ar Spered Meulet,
Bennozh ha joa 'barzh an ti-me
Muioc'h evit zo ganin-me.

Ar breutaer

Na petra 'teus 'ta, ma mignon,
Pa ne deo joaus da galon ?

Ar bazhvalan

Ur goulmig em boa em c'houldri,
Hag ur gudon em boa ganti
Ha setu degoue'et ar sparfell,
Ker prim hag ur barrad avel,
Ha ma c'houlmig en deus spontet,
N'ouier doare pelec'h 'mañ aet.

Ar breutaer

Da goulmig, ne'm eus ket gwelet,
Na da gudon wenn kennebeut

Ar breutaer a lavar n'en deus kavet koulmig ebet. Kinnig a ra d'ar bazhvalan ur rozennig kaer, un dañvouezenn leun a c'hreun, un aval. Bep tro e respont ar bazhvalan n'eo ket an dra-se e fell dezhañ : « Ma c'houlmig 'renkan da gaout. » A-benn ar fin e tigor ar breutaer an nor d'ar bazhvalan hag e kinnig dezhañ ar plac'h yaouank en doa miret evitañ...

Ar breutaer

Da'm liorz, ma mignon, on bet
Na koulmig 'bed ne'm eus kavet
Nemet ur frapad bokedoù,
Bleunioù lila ha rozennoù,
Ha dreist-holl ur rozennig kaer,
Savet e kornig ar voger.

Ar breutaer

Ne gavan koulmig mod ebet
Nemet un aval 'm eus kavet,
'N aval-mañ, krizet a bell zo,
Dindan ar we'enn, 'touez an delioù
En ho chakodig lakit-hi,
Da reiñ d'ho kudon da zebriñ,
Ha neuze na ouelo ket mui.

Ar bazhvalan

Ma mignon, ho trugarekat;
'Vit ma krizet, un aval mat
Ned eo ket kollet he c'hwezh-vat;
Met ne'm eus c'hoant deus aval 'bet,
Deus bleuñ na deus tañvoue'enn ebet,
Ma c'houlmig 'renkan da gavet
Me ya ma-unan d'he c'herc'het.

Ar breutaer

'Trou Doue! hemañ zo paotr fin!
Deus 'ta, ma mignon, deus ganin
Da goulmig wenn n'eo ket kollet,
Me ma-unan 'm eus hi miret,
Em c'hambur 'n ur gaoued olifant,
Me ma-unan 'm eus hi miret...

BOKED EURED

Ar ganaouenn-mañ a gont istor ar plac'h-nevez hag a rank kuitaat ti he mamm hag he zad evit mont da chom e ti he gwaz-nevez. Planedenn an holl verc'hed yaouank e oa. Un doare da lavaret kenavo da vare disoursi ar yaouankiz e oa ivez...

– Dont a ran da c'houlenn eskuz diganeoc'h kompagnunezh
Evit ma kanin ar boked, ma vefemp holl asambles.

Mar plij ganeoc'h dont da'm selaou en enor da zaou zen yaouank
Hag a vo eureujet hirio ouzh taol sakr ar sakramant.

Eizhtez zo tremenet a-boan abaoe oc'h avertiset
Evit dont tre betek amañ da gemer perzh en eured.

– Dont a ran da lâret kenavo, 'maez deus ti va mamm, va zad
Lec'h on bet maget disoursi hag ivez bet savet mat.

Plijout 'rae din va liberte, evit redek d'an dañsoù
Met bremañ 'rankin dilezel va holl akoustumañsoù.

– Rak hirio 'barzh ar gêrig-mañ e vo roet ar boked
D'ar verc'h henañ eus an ti-mañ evit bezañ eureujet.

Hetañ a ran deoc'h ar yec'hed hag ivez prosperite
Chañs vat deoc'h e-barzh ho menaj hag unvaniezh ivez.

Hag a-raok echuiñ ar son, goulennit 'ta karantez
Evit an daou zen yaouank-mañ 'pad ar rest eus o buhez.

Nemet pa zeuio ar marv da lakaat fin d'ho puhez
Gloar ha boneur, chañs hirbadus e-pad an eternite.

AR VIGOUDENN

Me 'm eus ha te 'peus ket
Ur Vigoudenn, ur Vigoudenn,
Me 'm eus ha te 'peus ket,
Ur Vigoudenn da gousket.

Pelec'h e vo lakaet,
Ar Vigoudenn, ar Vigoudenn,
Pelec'h e vo lakaet,
Ar Vigoudenn da gousket.

E gwele 'traoñ an ti,
Ar Vigoudenn, ar Vigoudenn,
E gwele 'traoñ an ti,
Ar Vigoudenn da c'hoari.

ME ZO 'VONT DA FORTUNIAÑ

Me a zo 'vont da fortunañ
O rimimi mon frère
Ha me ne ran nemet gouelañ
Rimimi, mon frère, la
Koukou merc'hed Tremenac'h !

Va mestrez-me he deus kalz arc'hant
O rimimi mon frère
Met allas allas n'eo ket koant
Rimimi, mon frère, la
Koukou merc'hed Lilia !

He fri zo ken hir ken tev
O rimimi mon frère
Ha tour an iliz e Rosko
Rimimi, mon frère, la
Koukou merc'hed Landeda !

He daoulagad ruz ha pikous
O rimimi mon frère
Zo evel ouzh re ar marmouz
Rimimi, mon frère, la
Koukou merc'hed Lanniliz !

Atav 'maon oc'h en em c'houlenn
O rimimi mon frère
Penaos dimeziñ d'ur plankenn
Rimimi, mon frère, la
Koukou merc'hed Gwiseni !

SOUBENN AL LAEZH

Ar ganaouenn-mañ a veze kanet e ti an dud-nevez e fin ar friko. An dud-nevez a veze en o gwele-kloz ha servijet e veze dezho ar soubenn en ur ganañ.

Sonit 'ta sonerien, sonit ha sonit gae
Emañ 'r soubenn al laezh o vont 'barzh ar gwele

Kentañ tamm anezhi, 'vo d'ar Werc'hez Vari
An eil tamm anezhi 'vo d'ho pried ha c'hwi

Trede tamm anezhi, 'vo d'ho tad ha d'ho mamm
Oc'h bet maget ganto pa oac'h yaouankik-flamm

P'vare tamm anezhi, 'vo d'ho preur ha d'ho c'hoar
Ha da gement hini a zo deoc'h hirio kar

'R pempvet tamm anezhi, a vo d'ar vignoned
Hoc'h eus darempredet betek deiz hoc'h eured

Sonit 'ta sonerien, sonit ha sonit gae
Emañ 'r soubenn al laezh o vont 'barzh ar gwele

SON AR CHISTR

Ar ganaouenn-mañ zo bet brudet gant Alan Stivell er bloavezhioù 1970. Ur ganaouenn da lakaat an dud da evañ ha da veuliñ ar chistr. Setu perak ne vez ket desket er skolioù...

Ev chistr 'ta Laou
Rak chistr zo mat, lonla
Ev chistr 'ta Laou, rak chistr zo mat
Ev chistr 'ta Laou, rak chistr zo mat
Ur blank, ur blank ar chopinad lonla
Ur blank, ur blank ar chopinad

Ar chistr 'zo graet 'vit bout evet
Hag ar merc'hed 'vit bout karet

N'oan ket c'hoazh tri miz euredet
'Benn 'vezen bemdez chikanet

Karomp pep hini e hini
'Vo kuit da zen kaout gwarizi

Eürusañ tud war an douar
Zo daou zen yaouank hag en em gar

WAR BONT AN NAONED

Ar ganaouenn-mañ zo ur ganaouenn dañs-round.

P'edon war bont an Naoned *ge marivon lure*
P'edon war bont an Naoned *ge marivon lure*
Martolod o troiañ *marivon luretig*
Martolod o troiañ *marivon lure*

Me 'welas ur plac'h yaouank
War ar pont o ouelañ

Ha me 'c'houlenn diganti
Perak e ouelit 'ta

Va gwalenn aour, emezi,
Er mor a zo kouezhet

Ha petra 'rofet din-me
Me 'yelo d'he zapañ

Hanter-kant skoed, emezi,
'Roin deoc'h a galon vat

'Vit ar gentañ ploñjadenn
Netra n'en deus gwelet

'Vit an eilvet ploñjadenn
Ar walenn zo touchet

'Vit an drede ploñjadenn
Ar paotr a zo beuzet

E dad a oa er prenestr
A ziroll da ouelañ

Tri mab am eus-me ganet
O-zri ez int beuzet

E bered sakr an Dreinded
O-zri e vint beziet

ITRON VARIA ROSTRENN

Ar c'hantik-mañ a gont istor un delwenn hag a zo bet kavet er bloavezh 1300 dindan ur vodenn drez hag a roe rozennoù brav e-kreiz ar goañv. Kanet e vez da zeiz pardon Itron Varia ar Bod e Rostrenn d'ar 15 a viz Eost. Kanet e veze ivez evit an euredoù dre ma'z eus ur poz a-ratoz evit ar priedoù yaouank. Anavezet eo muioc'h an ton bremañ peogwir eo bet kempennet gant Alan Stivell dindan an anv Spered hollvedel er bladenn Dublin.*

Mamm santel da Zoue, Itron Varia Rostrenn
Rouanez ar gêr-mañ, selaouet hon fedenn
Digoret ho tivrec'h, digoret ho kalon
Da reiñ d'ho pugale ho pennozh, ô Itron.

Ô Gwerc'hez, rozenn gaer, ô fleurenn vinniget
A-zindan ur vodenn, un amzer gozh savet
War lavar Albert Vras, da greiz kalon ar goañv
Er bloavezh trizek kant oc'h bet kavet amañ.

Gant an den gouiziek-mañ 'deus klevet ar re gozh
'Save e-mesk an drez, amañ ur vodenn-roz
Hag e pep koulz ar bloaz ar vodenn bepred glas
A daole bokedoù betek kreiz ar goañv bras.

Un dra ken souezhus el lec'h-mañ degouezhet
Hag a vije bemdez gant pep unan gwelet
A lakaas hon zud kozh da sellet pizh aze
'Vit ma vije gouiet petra 'oa kement-se.

Dont a rejont d'ar bod dindan ar wezenn toullet
Hag eus kreiz ar gwrizioù kenkent e oa kavet
Ar c'haerañ penn-gwerc'hez livet brav ha seder
Evel 'mañ e Rostrenn bremañ war an aoter.

*Sellet Gwerc'hez Vari, e-tal ho treid, stouet
Dre ar briedelezh tud yaouank unanet ;
Grit ma vo etreze ar vrasañ karantez
Ha ma vint atav staget doc'h lezenn Doue.

AR BLEIZ DIWEZHAÑ

Komzoù : Goulc'han Kervella.

Sonerezh : Jakez ar Born.

Me eo ar bleiz diwezhañ
A zo e Breizh o vevañ
Ar re all zo bet paket,
Barnet, krouget ha devet.

Tamallet 'oa bet outo
Lonkañ holl deñved ar vro
Gwashañ 'zo bugaligoù
Mammoù-kozh ha merc'hedigoù.

Brasoc'h, gwashoc'h tamalloù
Ar bleiz, mevel an diaouloù
'Gas d'ar sabad ar sorserien
Ar bleiz, genoù an ifern.

Brasoc'h tamall 'oa c'hoazh
Kas ar bed war an noazh
Lonkañ an heol hag al loar
Ankoù, mestr war an douar.

'Vito 'z eus stignet pezhioù
Lasoù-krog, graet toulloù
En o c'hig lakaet arsenik
Ha striknin en o lambig.

Tud 'yudas dre ar c'hoadoù
Ganto a bep seurt armoù
Roet dezho arc'hant hag aour
'Vit pakañ al loened paour.

AR BLEIZ HAG AN DAÑVAD

Paotr Treoure

Un dañvadig bihan 'oa oc'h evañ dour,
Dour-red ha sklaer evel ur melezour,
Pa zegouezhas warnañ ur pikol bleiz louet,
O klask e voued,
Ha du gant an naon :

– « Petra 'rez aze te, lampon ? »
Eme 'r bleiz gant ur vouezh garo.
« Piou 'n eus roet koñje dit-te, pezh divalo,
Da zont da louzañ va soubenn din-me ?
Me da lazho, sell ! 'Vezin ket keit-se ! »

– « Aotrou, eme an dañvadig,
Arabat deoc'h fachañ ;
'Barzh an dour-red emañ amañ,
Ha peogwir c'hwi zo dek paz uheloc'h
Evit aze moarvat an dour 'vo ket lousoc'h ! »

– « En louzañ 'rez,
A lâran dit, » eme ar bleiz didruez ;
« Ha me 'm eus klevet ouzhpenn warlene
Te 'poa klasket koll va brud din-me ! »

– « Penaos ? peogwir ne oan ket ganet ?
Me n'on ket bloaz,
Me zo 'tenañ va mamm c'hoazh ! »

– « Da vreur eo 'ta neuze ? »
– « 'M eus breur ebet ! »
– « Mat ! da gerent neuze !
Ur vandenn hailhoned,
Gant ar chas hag ar bastored,
Oc'h ober brezel din-me bemdez !
Me zesko dit, genoù glasvez ! »

Ha kerkent, hep hiroc'h abadenn,
E tap peg en e groc'hen.
Emañ strinket war al letonenn,
Ha lonket hep pebr nag holen.

An neb 'zo mestr d'en em gannañ
N'eo ket diaes dezhañ
Kaout ar ger diwezhañ.

O TONT EN-DRO EUS AR FRIKO

Ur ganaouenn dañs-round eus Bro-Bagan.

O tont en-dro deus ar friko,
O tont en-dro deus ar friko,
Ne lârin ket deoc'h kenavo,
Ne lârin ket deoc'h kenavo.

Diskan

Ge, farlaridondaine,
Ge, sach da c'har a-dreñv !

Emberr pa'z in da gaout da dad,
Emberr pa'z in da gaout da dad,
'Diskargin dezhañ 'r banne mat,
'Diskargin dezhañ 'r banne mat.

Ha da'z mamm e rin kement all,
Ha da'z mamm e rin kement all,
E tiskargin ur banne all,
E tiskargin ur banne all.

A-benn unnek eur hanternoz,
A-benn unnek eur hanternoz,
Setu 'mañ mezv an daou gozh,
Setu 'mañ mezv an daou gozh.

Neuze 'vo trouz cholivari,
Neuze 'vo trouz cholivari,
Ha jabadao e-kreiz an ti,
Ha jabadao e-kreiz an ti.

Ha jabadao e-kreiz an ti,
Ha jabadao e-kreiz an ti,
Ha reiñ e goan da Jañ-Mari,
Ha reiñ e goan da Jañ-Mari.

KANAOUENN EURED

Ur ganaouenn savet gant Paotr Treoure en enor d'an dud-nevez.

Paotred ha paotrezed, kanomp ur ganaouenn
D'an daou bried yaouank, da laouenaat o fenn.

Diskan

Ge, larigo, holla ho!
Enor ha yec'hed dezho!
Ma'z ay mat an traoù en-dro
Ha ma vo karantez eternal etrezo!

Ra chomint yac'h ha kreñv, barrek da labourat,
Gant ur stomog digor ha skilfoù da chaokat.

Ra chomo dreist pep tra, etre ar priejoù,
Karantez ha joa e-leizh o godelloù!

Ma tegouezh en o zi filiped da sevel,
Ozhac'h ha gwreg, bep eil, a lusko ar c'havell.

Ha dre ma savint bras, paotred ha merc'hedoù,
E vo dalc'het atav distlabez o frioù.

Yec'hed hag enor c'hoazh, yec'hed ha mil bennoz,
Plijadur er bed-mañ ha plas er Baradoz!